

T. ar Garrek : Kergrist-Moelou 1862 - Montroulez
1939.

Kanaouennou. Bet embannet e 1903.
Moderannaet eo ebt an doare-skriva.

Taolenn

E skol va farrez.

War bont an Naoned.

Lohaber.

A-raog ar stourmadeg.

E skol va farrez

A-boan ma oan ken uhel ha botez eun archer,
Ma'z oan kaset d'ar skol evdi deski galleg.
Rag euz ar yez-se c'hoaz ne ouien ket eur seurt ger,
Ne ouien evel va mamm nemed ar brezoneg.

M'ho-pije va gwelet diskabell ha diarhen,
Oh en em gaoud er skol, oll ho-pije c'hoarzet,
Va genou digor-braz, e peb leh e sellen,
Gand em fenn daoulagad eur bugelig dianket.

Reñket oh eur voger, evel ar zoudarded,
Tro-war-dro d'an ti-skol, me wele taolennou
Warno livet e du pep seurt anevaled
Gand an aotrou skolaer, anvet lizerennou.

Med ne jomis ket pell eur hrouadurig gouez ;
Soñjezonou nevez a deuas buan em spered ;
An anevaled du, kentoh hag eiz devez,
A oa deuet da veza va brasa mignoned.

Ma vijen bet ken fur ha m'oan mad da zeski,
N'em-bije ket bet skubet an ti-skol d'ar pardaez,
Med evel m'oan dibenn, ha ma karen c'hoari,
Em-eus skubet, siwaz ! leur an ti-skol aliez.

Biskoaz n'em-eus klemmet o chom e pinienn
Da houde beza greet eur farserez bennag.
Leñvet em-eus avad o kaoud ar zimbolenn
Evid komz brezoneg : goulenn a rit perag ;

Ra zigoro Sant Per din dor ar baradoz,
M'em-eus hen gounezet dre gement a zaelou ;
Mez penaoz pardoni d'an aotrou skolaer koz
D'am beza kastizet 'vid komz yez on Tadou ?

War bont an Naoned

Pa oan war bont an Naoned, *gai landemon libere (bis)*
Berjerenn o ouela *un deux trois delira*
Trois cavaliers de bois landemon megare.

Me gweled eur verjerenn,
War ar pont 'ouele...

Petra 'h-eus-hu da ouela,
Plahig din-me larit...

Ma gwalenn er mor kouezet,
Piou a yelo d'he zapa...

Petra 'rofet-hu din-me,
Me 'yelo d'he zapa...

Pemp-kant skoed en aour,
Mar gallit he zapa,...

Na d'ar genta ploñjadenn,
Ar walenn 'oe gwelet,...

Ha d'an eil ploñjadenn,
Ar walenn 'oe touchet,...

Ha d'an deirved ploñjadenn,
Ar mab a oe beuzet,...

E dad a oa er prenest,
O komañs da ouela,...

Tri mab am-eus-me ganet,
O-zri ez int beuzet,...

En bered sakr an Drinded,
'M-eus tri mab douaret.

Lohaber

Ton a Vro-Skos.

P'eo eet er bez yen ar mignon 'teus karet,
Lez e dechou da hun gantañ 'barz ar vered ;
Pe, mar sav al lenn taolet war o gorre,
Gouel warne didrouz, hag o huz adarre ;
Ha ma ra poan ganit soñjal pegen pell
Deuz hentchou ar *Sklêrder* 'oa troet e askell,
Bez laouen o soñjal out bet ar steredenn
He-deus hen distroet war-zu ar *Sklêrijenn*.

Daq goantiri werh ha da zornig glan dit-te
Eo a zeskas dezañ hent ar wir garante',
Hag hen plegas dindan lezenn ar Gened,
'Leh ar fals-doueou 'n-oa gwechall pedet.
Dreist glannou eur vuhez pell dall ha garo,
Te 'zavas 'vel ma sav war vor gwareg ar glao,
Ha mar c'hoarzas outañ eun eurvad pemdezieg
War diwez e amzer, te 'n hini 'oe kirieg.

Pa glaske sevel mouez e youlou gwechall,
Pa hadpoanie ar Gaou d'e drei war an hent fall,
N'oa ken 'med selled ouz kaerder da lagad,
Ha pep fallentez 'nije kuit 'n eur bagad¹.
Beleien an Heol, pa varv tan o aoter,
N'hallont hen hadc'hweza nemed ouz ar sklêrder ;
'Vel-se, mar deue 'r Vad 'n e galon da zemplañ,
Da zell c'hoaruz hepken rente buhez dezañ.

¹ 'n eur bagad : an oll re a-gevred.

A-raog ar stourmadeg

I

Dre ar spi 'zav 'n on halonou
O hedal emgann warhoaz,
Dre an heol-mañ ah a da zegas
Deom frankiz pe chadennou,
Dalh soñj n'ez eus er vuhez
Hep frankiz nemed c'hwerventez :
Evel an heol er wagenn,
Ar stourmer 'n e vez 'ziskenn
Dindan atao daelou puill e vroad !
Eüruz an neb a gouez maro,
War e dal bennoz tud e vro.
Eur sked divarvel war e wad :
Mez pegen kaer maro (*taer*) ar re
A gouez gand eur vriad lore !

II

Dirag ludu e dan brezel
An enebour drouglivet
A zoñj er stourm 'leh on-doa brevet
'Dan² on zreid lorh e vanniel.
Diwallit na vo hadskoulmet
Ar chadenn on-doa diframmet.
Klevit ! galv ar horn-bual !
O ! 'barz ma vo noz teñval,
Ra sono ganeom tro-dro laouen !
Meur a galon, c'hoaz birvidig,
A vo 'benn neuze maro-mik.
Bouzar da vouez an Treh zoken ;
Mez pegen dous (*taer*) hun diweza
Neb³ 'vo eur bobl deuz e ouela !

² 'Dan : Dindan

³ Neb : An neb